

16.

Prestik Nata 'varvas ive,  
Eus an Env, Adrien Iare :  
« Deut, emezhan, pried santel,  
« Deut d'an eürusted eternel. »

17.

Natali, heb douetang ebed,  
A ro skouer vad da bep pried,  
D'en em garet hervez Done,  
Evit beza eürus eun de.

18.

Pedi a rer sant Adrien,  
Santez Barba, sant Bastien,  
Ouz ar guentr hag ouz goal glenved,  
Da veza diouallet bepred.

19.



Ar zoudardet, an dud a vor  
A gav ennan eur Protector :  
Ra vezimp oll devot dezhan,  
Hag e vezimp eürus ganthan.

Imprimatur :

Quimper, 18 Mai 1888.

F. OLLIVIER,  
V. G. H.

Kemper, moulet e ti de Kerangal.



# KANTIK

## SANT ADRIEN

PATRON PARREZ SANTEC

Ton : Iliz nevez Molenès.

### DISKAN.

Santegis, savomp hor mouez,  
Meulomp hor Patron asamblez,  
Meulomp ar merzer Adrien,  
Hag hon dezho dreizhan souten.

1.

Adrien 'n he genta amzer,  
D'eun tirant kris ioa ofiser,  
Karget da lakat d'ar maro  
An oll gristenien euz he vro.

2.

Hano Jesus en ho ginou,  
Ho joa e kreiz ho oll boaniou,  
An env digor a uz ho fenn,  
Hen dougas da c'houl sklerijenn.

3.

He spered eün 'deuas abred  
Da veza treac'h d'an drouk-speret,  
Hag ec'h anzavas oa kristen  
O trei kein d'ar fals-kreden.

4.

O kleo kement-ma, Maximien  
C'halvas dirazhan Adrien ;  
He c'hounit flour a c'hoanteas,  
Ha goud' er prizoun hen taolas.

5.

Ar merzer en doa eur pried  
'Virit aman beza meuled :  
Natali ez oa he hano,  
Arc'heal ve mad d'he lezhano.

6.

Pa glev eo Adrien chadennet  
'Vit ar Feiz en deus anzavet,  
Natali, e leac'h skuill dañlou,  
Da Zoue 'ro meuleudiou.

7.

Ar c'hreg santel 'red d'ar prizoun  
Ha d'he fried 'lar a galoun :  
« Eus an enyou setu an or,  
« Dalc'h mad, Adrien, d'as tenzor.

8.

« Guelloc'h 'peus breman eget aour,  
« En he genver, perlez 'zo paour ;  
« Da Jezus na renonsi ket,  
« Hag e pezo guir joausdet. »

9.

Araok beza barnet da-vad,  
Adrien d'ar gear 'reas eun droad ;  
Natali 'refus he velet :  
Asur, Jesus en deus nac'het.

10.

« Alo, Nata, ne grenit ket,  
« Stard em feis me chom bepret,  
« Me c'houl ar zalud diveza  
« Hag ive oc'h aliou guella. »

11.

Natali, neuze laouen bras,  
A lam da boket d'he goas,  
A zo he zonj varzu an Ee  
Da veza fidel da Zoue.

12.

Neuze kennerzet ar merzer  
A zo dispount rak ar barner ;  
D'he brizoun, pa oe distroet,  
A daoliou bas oe dispennet.

13.

Mès an tirant Maximien  
A garfe gounit Adrien ;  
« Va mignoun, deut prout var ho kis,  
« Ha d'hon doueou grit sakrifis. »

14.

— « Nan, Adrien, 'me Natali,  
« Ne zilaou ket komzou difei :  
« En honor d'hor Zalver Jesus  
« O skuill da c'hoad te zo eürus. »

15.

He dreïd, he zaouarn oe trouc'het,  
E peb'feson he gorf brevet ;  
Nata n'he genver a jomas,  
Ha da vervel hen zikouras.